

Son an distoufer

Chanté par Kanerien Langazel

Collecté par Yanna PLOUGOULM - Fest-Noz Dastum Bro Leon à Lesneven - 16 octobre 2004

Son an distoufer, selaouit hag e klevfot (4 gw)

Hag e klevfot kanañ *kanaouenn an dour-tan*,

Hag e klevfot kanañ *son an distoufer* (2 w)

Son an distoufer, eur chañson 'zo kompozet (4 gw)

A-nevez er bloaz-mañ *kanaouenn an dour-tan*,

A-nevez er bloaz-mañ *son an distoufer* (2 w)

Son an distoufer 'zo graet d'ar baotred yaouank (4 gw)

'Gav mat an odevi *kanaouenn an dour-tan*,

'Gav mat an odevi *son an distoufer* (2 w)

Son an distoufer, plijadur vras ho pefe (4 gw)

Mar gellfot hen deskiñ *kanaouenn an dour-tan*,

Mar gellfot hen deskiñ *son an distoufer* (2 w)

Son an distoufer, na pa'z it-c'hwi d'ar foarioù (4 gw)

D'ar foar pe d'ar marc'had *kanaouenn an dour-tan*,

D'ar foar pe d'ar marc'had *son an distoufer* (2 w)

Son an distoufer, ne c'hell ket ar marc'hadour (4 gw)

Ganto en em akordiñ *kanaouenn an dour-tan*,

Ganto en em akordiñ *son an distoufer* (2 w)

Son an distoufer, ken 'vez prometet deho (4 gw)

Eur banne odivi *kanaouenn an dour-tan*,

Eur banne odivi *son an distoufer* (2 w)

Son an distoufer, setu aze braoañ micher (4 gw)

D'ar gwazed diskabell, *kanaouenn an dour-tan*,

D'ar gwazed diskabell, *son an distoufer* (2 w)

Son an distoufer, deomp 'ta bremañ d'ar merc'hed (4 gw)

Hep feukañ den ebet, *kanaouenn an dour-tan*,

Hep feukañ den ebet, *son an distoufer* (2 w)

Son an distoufer, koll a reont o zavañcheroù (4 gw)

O c'hoef diwar o fenn, *kanaouenn an dour-tan*,

O c'hoef diwar o fenn, *son an distoufer* (2 w)

Son an distoufer, setu aze braoañ micher (4 gw)

D'ar merc'hed diskempenn, *kanaouenn an dour-tan*,

D'ar merc'hed diskempenn, *son an distoufer* (2 w)

Lalala...

Tralalaladando kanaouenn an dour-tan,

Tralalaladando son an distoufer (2 w)